

GUERS

*Græt gant PER AR YAN, var eur
Maleur arruet e Quemper-Corantin,
da Sul ar Baczion.*

Var ton : *Pevar Den a barrès Pluffur.*

Deoc'h-u eta, Guere'hes Vari,
E teuan den n'em recommandi;
D'am Eal mad a dar Speret Santel,
Da rei dign selerigen heb appel.

Ma tisclerjign e ber amser
Ar maleur so erruet e Quemper:
Quement a glevo e c'hana
A dieffe e hoat donnet da yenia.

Clevet oc'heus comps a valeuriou
Cals a dud drezenni ho deus souffret ar maro;
Mæs evel quent ar c'hruella poan
E tevi e beo e creis an tan.

An autrou Sant Loranç beniguet,
Hennes a ouffe deoc'h lavaret
Peguen cruel eo ar poanniou
Ho tevi e beo e creis ar flammou.

Deiz evit deiz da nôs sul ar baczion
Are-ma ha voa joaüs a galon;
Allas! na songe hini a ne
Eviije hirroc'h an nôs evit o bue.

Prest goude an unecq eur
E voa commancet ar maleur,
E maïnt ho tevi e creis an tan
Quercouls ar bras evel ar bian.

Allas, ma bugale, emezi,
E creis an tan red eo devi
Hep na galloud en em souten
Na caout sicour digant den.

Eur soudard e voa oc'h ober faccion
 E quichen dor ar prison ,
 Ha pan devez guelet an tan goal
 Eo bed commanceet da gryal :

An hep so consquet dihunet ,
 Car ar maleur a so presset :
 Deomp da sicour ha souten ;
 Mæs , allas ! neus quet a voyen.

Pa voant eat e penn an ty
 E clefjont ar c'hlem hac ar c'hry
 Gant ar vugale hac ar vamm
 Ho tevi e creïs an tan flamm.

An tocsin hac an taboulin
 A sonne e Quemper-Corantin
 Da avertissa ar bomperyen ,
 Car ar maleur a zo certen.

Dont a rezont bras ha bian ,
 En eur gryal : dan tan , dan tan ,
 Hini e bed na boultrone
 Evit mont e danger he vue.

An escop hac ar veleyen ,
 Ar freret hac ar scoleryen ,
 Tuc'hentil ha paysantet
 Tout e maint oll ho redet.

Ar soudardet, ar gard national ,
 Toud e redont a ractal
 Ma vije moyen var boès sicour
 E vije obtenet dezo recours.

Ar gendarmet, an archeryen poulicz,
 Ar c'homiczer a re a liez
 Da zerc'hel dour dar bomperyen
 Da dauler var neïn an doën.

Allas ! ma c'halon a vaneq dign ,
 Va goat em goaziet a teu da frimi
 Pa songean noc'h eus clevet netra
 Evel ma lavarin deoc'h breïma.

Pa glevas ar vamm e bugaligou
 O erial e creïs ar flammou ,
 A rea muyoc'h a boan dezi
 Evit ma rea an tan eus e devi.

Credet hardiz va foanniou zo bras ;
Ar c'hieq var va æsquern zo dija poas ,
Ha c'hoas e carfen am be da souffri
Poanniou va bugale gant va hini.

E map oaget a drivac'h vloa
Gant eur gourach ar v rassa
En nem laosq dan traon eus an eill-estach ;
Credit e æsquernigou a stracas.

000035

Eur c'hostez anezan a voa grillet
Hac e galon a voa mantret ,
C'hoaz e save en e zao he-unan
Eu eur goulen : Pe-leac'h e ma va mamm.

Dan hospital e voa douguet
En trista stad ma affech da velet ,
Uu tu a nezan grillet gant an tan
Hac e galon mantret gant ar boan.

Diou verc'h e devoa o servichi
Pa voa annoncet dezo ar maleur cri ,
Ma lavare an eill hac e ben anezo :
Me garfe e vent o vont en douar ganto.

A-dalecq an eür eus a vrema
Betec an eür diveza ,
Pa teuyo din sonch eus ho maro ,
Va daoulagad a ranco seuyha daëlo.

Ho æsquernigou a zo dastumet
Nemed ar re a zo bed luduet ;
Lacqueat e zint ho fevar er memens goëst
Ha casset dar veret assambles.

Eur pobl dud a voa en ho enterramand ,
Qen boure'hissyen qen paysand ;
Ho c'halonou tout a sesye
Hac an dour gant ho diou jodt a rede.

Me ho suppli , ô va Jesus !
D'ober outo eur sell truësus ;
Prezervet a nezo eus tan ar purgatoar
Pa zint deved e beo var an douar.

An nep zo bed quirieq
Eus ar maleur a zo erruet
A voa cousquet er marchosi
Pa zeuas an tan den difuni.

Sortyet ebed e secret
 Pes a zo caus ma ze punisset ,
 E lec'h beza dihonet tud an ty
 A ranc ober e-hunan e sorty .

A voalc'h em eus deoc'h lavaret
 Evit ar blijadur o peus eus ma c'hlevet ;
 Monet a ran da finissa
 Dre eur maleur ar c'hruella .

An deiz varlerc'h , e parres Plomeur
 A zo arruet ar memes maleur
 Gant un den privet a sclerigen ;
 Sillaouet tout guytibunen .

Renan Caouda I en e vele
 A goeze an tan var e c'horre ,
 Hac evit songeal en em sicour
 E tiredas da doul an nor .

Allas an nor a voa alc'hoët
 Sortial er meas ne alle quet ,
 Bale elec'h marcare dre an ty ,
 An tan a voa bepret eus en devi .

En toul an nor e ma bed couet
 Hac eno e zéo bed chomet ,
 Ha pa voar deüt da seval anezan
 E couëse e entrailloù de ountan .

E æsquern a zo bet destumet
 Nemet eur vrec'h dezan ne quet bed cavet ;
 Hounnes so bed luduet quicq hac æsquern ,
 Oh ! crissa maro eta , christenien .

Cetu eur melezour aman ;
 Ma breur , ma c'hoar , sellomp ennan ,
 Da lâret eo , redoublomp her pedennou
 Ma pellaï diouzomp ar goal blanedennou .

Quement a glevo ar guers-man
 A dleffe lavaret da neubeudtan
 Bep a bater ha bep a ave
 E delivrançz deus ho ene .

O va Jesus ! me o suppli ,
 Bezit eta truhez ouzomny :
 Recevet ac'hanomp en ho gloar
 Pa ezaïmp quit divar an douar .